

## D'an 30 a viz Du

- Er bloaz a c'hras 60, merzherenti sant Andrev, Abostol, Patrom Bro-Skos. Andrev, breur da Bêr, ha pesketaer eveltañ e Bethsaida, a voe ar c'hentañ eus an danvez Ebestel o kejañ gant Jezuz war ribl ar Yordan, Eñ eo a zegasas Pêr da Jezuz. Hervez an hengoun e voe abostol ar Balkanioù ha goude bezañ embannet an Aviel e Bro-C'hres e varvas e Patras staget ouzh ur groaz e stumm un X anvet hiviziken "Kroaz Sant Andrev".
- War-dro 360, ganedigezh en neñvoù sant Frumenz, abostolour Etiopia lec'h ma vez lesanvet Abba Salama. Ganet e Tir e Fenikia e voe skrapet gant preizataerion war un dro gant e vreur Edesioz. Sachañ a reas an evezh e lez Abisinia ken bihan ha ma teuas da vezañ merour ar palez. Eskobet e voe gant sant Atanaz Aleksandria e voe eskob kentañ rouantelezh Aksoum.
- E 550, e Fenisia, distro da Zoue sant Zosim, manac'h e manati Tir, lesanvet "bravig an uvelded" gant sant Teodor ar Studit, burzhudour anavezet evit burzhud al leon a gemeras lec'h e azen en doa debret.
- E 1835, merzherenti sant Jozef Marchand, beleg eus Kevredigezh Misionoù Diavaez Pariz, kondaonet da voueviadur ar mil gouli gant an impalaer Minh Mang e-kichen Hue en Annam en Indez-Sina.
- En Iwerzhon, ar venec'h sant Airine ha sant Toman (Tuñvan) hag ar vaouez santel Caoimhseach.

## D'ar 1añ a viz Kerzu

- War-dro 283 e Roma, da vare an impalaer Numerianus, merzherenti sant Diodor, beleg, ha sant Marian, diagon, merzheriet.
- Er bloaz 366, e Piktavi hiziv Poatie, distro da Zoue santez Florenzia (Gl. Florence), gwerc'hez. Kanttroet gant an eskob sant Hiler pa oa harluet e Frijia e tistroas gantañ hag e voe penitiourez e Comble.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Tudual lesanvet Pabu, eskob abad Landreger. Ganet e Devnon (Domnonea Breizh-Veur), mab Haelog ha santez Koupaia, breur sant Luner ha santez Sev, e teuas d'an Arvorig gant 72 manac'h en o zouez ar sent Lavan, Goneri, Meron, Paol, Rivelen, Pergad, Briag, Gireg. Sevel a reas e vanati lec'h m'emañ hiziv Landreger a zeuas diwezhatoc'h da vezañ penn eskobiezh Bro-Dreger.
- Ar sent Paol ha Maeron, menec'h, diskibled sant Tudual, beziet o daou ouzh e dreid, ha santez Maelc'hen, maouez santel, intañvez, a gane o dilhad da venec'h sant Tudual.
- En IXvet kantved, sant Brezhon pe Brezhoc'h, manac'h e Sant-Malor e-kichen Dinan, marvet en abati Redon.

## D'an 2eil a viz Kerzu

- War-dro 260, da vare Valerianus, merzherenti santez Aorelia pe Valeria a Roma, a-gevret gant he mamm Martane.
- War-dro 362, e Roma, da vare heskinadeg an impalaer Juluan an Diansavour, merzherenti sant Pimen pe Pigmen, beleg. Taolet e voe en Tevere.
- War-dro 363, da vare an hevelep heskinadeg, merzherenti santez Bibiana, merc'h Flavian prefed e Roma. Kondaonet da vezañ bac'het en un ti gasterezed e vevas c'hwec'h miz ganto hep ma teufed a-benn d'he lakaat da goll nag he feiz nag he gwerc'hded. Neuze e voe staget ouzh ur peul ha skourjezet betek ar marv. Er penvet kantved, e lakaas ar pab sant Simplis ur brientiliz war he anv, war an Eskilin e Kêr Roma.
- E 537, war enezenn Palmaria a-ziavaez da c'hGaeta en Latium, merzherenti sant Silver, pab. Dre ma nac'has asdavelañ an disivouder Anthim, eskob Kêrgustentin, bet digarget gant e ziagentour sant Agapit e voe, war intrudu an impalaerez Teodora, skarzhet eus e sez hag harluet da gentañ en Azia ha da c'houde war an enezenn lec'h ma varvas diwar ar poanioù kriz diwasket gantañ.

- E 660, sant Eloa, eskob Noyon. Orfebour eus e vicher e save pezhioù meurdeus en enor d'ar sent. Anvet e voe moneizour Klotar II ha, da c'houde, teñzorer Dagoberzh Iañ a Vro-C'hall. Gant e vignon Dagon pe sant Ouen, kañseller ar roue, e harpas savidigezh meur a vanati. Mont a rejont o daou da veleg hag e voent eskobet d'an 13 a viz Mae 641, Eloa evel eskob Noyon ha Tournai hag Ouen eskob Rouen.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Tudeg, abad Landevenneg, merzher.
- En Iwerzhon, e 662, sant Kommin (Iw. Cuimín), manac'h.

### D'an 3 a viz Kerzu

- E 298, e Tanjer e Maoretania, merzherenti sant Kasian. Grefier e oa el lezvarn hag o welout kalonegezh ar gristenion kondaonet d'ar verzhherenti e voe gounezet d'ar feiz ha lakaet d'ar marv d'e dro.
- E 650, ganedigezh en neñvoù sant Birin, eskob misioner bet kaset gant ar pab Honorius Iañ da Vreizh-Veur. Badeziñ a reas roue Wessex, avielañ Saksoned ar C'hornôg ha diazezañ e sez e Dorchester.
- E 1552, distro da Zoue sant Frañsez Xavier, beleg jezuist, patrom ar misionoù. Genidik eus Bro-Navar e voe unan eus keneiled gentañ sant Ignas a Loiola e Pariz. Degas ar reas ar C'heloù Mat d'an Indez e-kerzh dek vloaz. Eno e vadezas miliadoù a baganed. Goude-se ez eas da Vro-Selan ha da Vro-Japan hag e varvas e 1552 war an enezenn Sansian e-tal da Vro-Sina. Emañ e vez e Kêr-c'hGoa lec'h ma c'hoarvezas meur a vurzhud dre e hanterouriezh.
- E Breizh-Veur, er Iañ kantved, sant Lucius an Henaour, roue. Moarvat e oa Kile, lesanvet "Kile an hollgaer", diazeour Camolodunum hiziv Colchester, mab Karatakos. Reiñ a reas degemer da sant Timoteoz, mab sant Pudens ha santez Klaodia deuet da avielañ Enezenn-Vreizh.
- En IIvet kantved, sant Lucius ar Yaouaer, roue hag eskob. Hervez an hengounioù breizhveurek e vefe kentoc'h hemañ ar roue anvet Lewer Meur e predeneg goude e vadeziant a reas anezhañ roue kristen kentañ ar gristeniezh o c'henel. Skrivet en dije d'ar pab Eleuter, a renas etre 175 à 189, evit goulenn bezañ kelennet a-zivout ar feiz. Kaset e voe dezhañ sant Fagan ha sant Duvian. Deuet da vezañ beleg e voe abostolour ar C'hrizoned hag eskob kentañ Cuir pe Coire.
- Er VIIvet kantved, sant Avran (Gl Abran), Iwerzhonad pe Breizhad, abostolour e-kichen Reims e Champagne e Bro-C'hall gant e c'hwec'h breur: sant Bearan pe Beran (Gl. Vêran, Bherand) a vez lidet d'an hevelep deiz hag ar sent German (Gl. Germain), Givrian (Gl. Gibrian), Helan (Gl. Hêlan), Peran (Gl. Pétran) ha Trezan (Gl. Trésan). En eskopti Sant-Mac'hloù e kaver div barrez tost an eil ouzh egile : Sant-Avran (Gl. St-Abraham) hag Hellean.
- En Iwerzhon, sant Maccoige, manac'h e Lios Mór (Lesveur).

### D'ar 4 a viz Kerzu

- War-dro ar bloaz 306 e Nikomedia, merzherenti santez Barba pe Barban, gwerc'hez. Gwarezourez diouzh ar gurun ha diouzh an tangwal, patromez ar bomperion. Hag hi ur plac'h yaouank kaer ha pinvidik e teuas da vezañ kristen. Neuze e tivizas he zad kounnaret he bac'hañ en un tour gant ar spi d'he lakaat da zilezel he feiz. Hemañ, dirak he dalc'husted a vountas an tan en tour ha goude bezañ kavet e verc'h dibistik a droc'has dezhi he fenn. Tan ar gurun a gouezhas warnañ avat hag e voe lazhet.
- War-dro 749, ganedigezh en neñvoù sant Yann Damask, beleg, doazhour eus an Iliz. Edo o labourat e lez Kalif Damas pa glevas ar galv d'ar vuhez vanac'h war-dro 710. Mont a reas da vevañ e manati sant Sabas, e gouelec'h Youda, ne guitae nemet evit prezeg e Jeruzalem. Eno eo e skrivas e verrzisplegadur war feiz reizvriek an Tadoù Hellenat, hag e tifennas gant nerzh kehelerezh an ikonennoù santel. Bez' ez eo unan eus ar pennañ testoù eus hengoun mariel an Iliz.

- E Breizh, er Vvet pe VIvet kantved, sant Maelar pe Melar, abad. Penitiour e koadeg Sisi e bae Konkaven (Cancale), e avielas ar vro. Emañ e vez e-kichen chapel Santez-Koulm Kervered e parrez Sant-Loup, enezennad Dol e Bro-Oueloù-an-hanternoz en eskobiezh Sant-Brieg.
- En Iwerzhon, e 773, sant Suairleach, manac'h.
- En Iwerzhon, sant Bearchan, manac'h.
- Kounidigezh savidigezh relegoù sant Erwan.

### D'ar 5 a viz Kerzu

- E 532, nepell diouzh Jeruzalem, sant Sabbas, abad, lesanvet Perlezenn ar Sav-Heol. Diazezañ a reas un abati a gemeras e anv goude-se hag e voe e-touez mistri bennañ ar vanac'helezh e Palestina. Argaset gant ar Bersed hag an Arabed e ziskibled a dec'has da Roma lec'h ma vrudjont e gehelerezh.
- E 304, e Tebessa e Numidia, merzherenti santez Krispina a dTagore, bet meulet gant sant Eosten. Maouez a renk uhel ha mamm a diegezh e nac'has aberzhiñ d'an idoloù. En abeg da-se e voe jahinet ha dibennet war urzh ar prokoñsul Anolin da-geñver heskinadeg Diocletianus.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Houarvian, tad sant Herve, pried santez Riwanon.
- En IXvet kantved, en abati Redon, tremenvan sant Bretoc'h pe Brezoc'h, da gentañ manac'h en abati Lehon.
- E mervent enezenn Vreizh (kreisteiz Bro-Gembre), er VIvet kantved, sant Keurdav (Kb. Carw Daf). Tiern e Brycheiniog, em dennañ a reas da vanati sant Ildud.
- Er VIIvet kantved, sant Lua, manac'h iwerzhonat a ambrougas sant Koulman Veur betek Bobbio lec'h ma varvas.

### D'ar 6 a viz Kerzu

- War-dro 345, ganedigezh en neñvoù sant Nikolaz ar Burzhudour, arc'heskob Mura (Myr) en Azia-Vihanañ. Genidik eus Patar e rannvro Lisia en Anatolia (hiziv e Turkia) e voe emzivad ken abred hag e eizh vloaz ha desavet gant e eontr Nikolaz a oa eskob Mura. Anvet e voe eskob d'e dro, marteze kent dezhañ bezañ beleget. Moarvat e kemeras perzh e goursenez Nikaia e 325. E vrud en em ledas abalamour d'e feiz gredus, d'e oberoù mat ha d'e vurzhudoù niverus. Skeudennet e vez alies gant tri bugel moarvat dre ma saveteas tri faotr yaouank tamallet e gaou gant ur barnour goubrenet da vezañ aozet ur gabaduilh, pe c'hoazh dre ma reas kement all o tifenn dirak an impalaer Kustentin, tri ofiser (Neponius, Erpinionus hag Ursus) tamallet da irienniñ. En unnekvet kantved e kreskas e vrud er C'Hornôg gant treuzlec'h e relegoù da gêr-vBari e kreisteiz Italia.
- War-dro 484, santez Denesa ha keneñvoradur merzherion Afrika da vare heskinadeg ar Vandaled dindan ar roue ariat Hunnerig. Bez' o devoe da c'houzañv boureviadurioù spontus evit difenn ar feiz katolik. En o zouez e vez graet meuleudi pergen eus Denesa hag he mab Majorig, ur bugel yaouank flamm a voe kennerzhet gant e vamm da chom start er jahinerezh e 484. Delc'her a reer soñj ivez eus Dativa, c'hoar santez Denesa, Emil a oa mezeg, Leoñs, Tertius, Sibida, Servius, Victrix.
- War-dro 649, ganedigezh en neñvoù santez Jertruda a gCambrai, leanez. Bez' e oa eus tiegezh ar rouaned merovingat hag unan eus e vibion a voe "maer ar Palez". Ur wezh intañvezet ha war ali sant Amand en em dennas en digenvez e-kichen Camaracum (hiziv Cambrai) hag e tiazezas kouent Hamage a voe renet war he lec'h gant he nizez santez Euzebia.
- Er VIIvet kantved, sant Gobhan Fionn (Govan Gwenn), manac'h en Iwerzhon.
- E 943, sant Kustentin, roue Skos, manac'h Kile-Doue, abad Sant-Andraz.

Sant-Andrev, Erge-  
Vras, bro-C'Hlazig,  
Kernev

